


tirage différent du 886
Olivier

MERZERINTI

SANT LORANS.

War don : *Ele ann eno, deut d'ann douar,*
pe donio 9, 25 ha 27 Dom Herry.



Ann otro sant Lorans merzer

A zo mad he gemer da skouer.

Ha rei da Zoue eveltan

Enn hon c'halon ar plas kentan.

O ia ! Kristenien , her c'hredet ,

Dreist da gement tra zo er bet

Sant Lorans mad hag evuruz

En deuz bet karet he Jezuz.

Skler walch'en deuz-an diskoueet
Ann deiz oa bet merzeriet ;
War dan ar bourrev a drec'he
Ann tan euz karante Doue.

Ann dekved a viz est , enn Rom
Elec'h oa d'ar c'houls-ze o chom ,
Bla daou c'chant eiz hag anter kant ,
D'ann deiz-ze e varvaz ar zant.

Gwall vrezel oa neuze c'hoari :
Valerien , ar mac'her kri ,
En defoa laket enn he benn
Lazan dre-oll ar Gristenien.

Pa roaz urz d'ho frizonian ,
Ar Pap santel er penn kentan ,
Da c'hortoz bean bourreviet ,
Sant Lorans a oa gwall nec'het.

Gwelan re leiz he zaou-lagad
Ha derc'hel da grial : « Ma zad ,
» Ma c'haset genac'h d'ar maro
» M'ho heulinn beteg enn Envo. »

Ar Pap respontas evelenn :
» Ma map , beet diniec'h agrenn ,
» Ar pez hoc'h euz c'hoant a vo groet ;
» Abenn tri devez em heulfet ;

» C'hoaz zoken ho merzerinti
» Vo kaeroc'h evit ma hini ;
» Rak kreizho nerz oc'h c'houi, mapker,
» Ha d'am noad koz e tinerzer.

» Distroct buan war ho kiz ,
» Klasket mat danve ann iliz
» Ha lodennet oll d'ann dut paour ,
» Ann ed, ann arc'hant hag ann aour . »

Ar zant penn da benn a zentaz ,

Ha chetu raktal e teuaz

Unan abeurz Valerien

Hag a laraz d'ar Gristenien :

« Genac'h chomo ann Aviel ,

» Ho pern komjo kaer ha santel ,

» Red vo d'ac'h , vat ! rei ho mado

» Da Valerien , ma otro . »

Sant Loranz laraz evelenn :

» N'ho po ked ane eunn eskenn :

» An traou-ze oll zo et d'ober

» Aluzenno , ma otro ker . »

Ann den-ze a iez drouig ennan

Pa glevaz ar c'helou fall-man ,

Ken a laraz garo spontuz :

» Lorans , dinac'het ho Jezuz .

- » Ne n'oc'h ket hep bean klevet
- » Eo bet d'ann oll gourc'hemennet
- » Gant Valerien , ma otro ,
- » Dont d'ezenzi hon doueo. »

Sant Loranz respontaz buan :

- » Otro paour , koll a ret o poan ,
- » Rak me enn bev hag enn maro
- » Vo Jezuz hep ken ma Otro.
- » Biken ezenz digenin , vat !
- » N'ho defo ho skeudeno koat ;
- » Me ra goab euz doueo pri
- » Dare da gouean war ho fri ;
- » Daoust d'ho c'haerder a ziavez
- » N'ho deuz ked a c'halloudegez ;
- » Ann diaoul hell ho kas oll gantan ,
- » Ha marteze c'houi ar c'hentan. »

War ze teuaz gand an treitour ?

« Lorans , eme-an , komzer flour ,

» Traou walc'h hoc'h euz laret din-me ?

» E chominn ket pell en ho tle.

» Prim aman , potred ; c'houeet tan ,

» Eunn tan na zevo ket buan ,

» Eunn tan a boac'ho divalo

» Ma bado hiroc'h he boamio. »

Sant Lorans eunn tammik goude

Peuc'huz war he c'hrill a lare :

» Ann tu-man , otro , zo poaz mat ,

» Troet egile da boac'hat. »

Goude c'hoaz laraz evelenn ;

« Tanvaet kig ar Gristenien


» Evit gout , mar keret dibri ,

» Ha gwelloc'h eo poaz evit kri. »

Soufr a reaz enn gwir Gristen
He verzerinti penn da benn
Kalonek mad, hep klemm ebet,
Ken a oa ann oll souezet.

Dre ann toll krenv-se ar Romiz
Oe peur c'honeet d'ann Iliz,
Ho foz doueo diskaret :
Sant Prudanz hen deuz lavaret.


Otro sant Loranz gallouduz,
Teurveet goul digant Jezuz,
Ha digand he vamm ar Werc'hez
Gras ma varvimb er zantlez.



Moulet e Gwengamp, gant TANGUY.



Conde e Ribera



Tanquet de la Guerra

Holye e Guernsey, Saint Lazare
— Ha